

# KANTIK AN ILIZ PARREZ

Guillou



1. Pe - gen dous eo, Dou - e san - tel, Be - va e skeud ho ti - ouas - kell!
2. San - tel, san - tel, teir gwech san - tel Eo ti ar Rou - e peur - ba - del;
3. San - tel e - vel ar c'hraou dis - ter Eo gan - (n)et en - nañ or Zal - ver,
4. An i - liz eo ti ar par - don, Ti ar be - denn, neiz ar ga - lon:
5. M'ho - peus naon ha m'ho - peus se - hed, Tos - tait ouz ta - ol ar ban - ked:



1. Tri - dal a ran en hoc'h i - liz, Ha va c'ha - lon a lamm em c'hreiz.
2. San - tel 'vel ar spern en - tan - (n)et A we - las gwe - chall ar pro - fet.
3. San - tel meur - bed 'vel ar me - ne Ru - ziet gand gwad gwir Vab Dou - e.
4. E - harz Je - zuz, tud gla - ha - ret, E - ma ar peoc'h hag ar ye - hed.
5. Je - zuz am - (m)añ d'e vu - ga - le, A ro ba - ra di - vin an neñv.

1. Pegen dous eo, Doue santel,  
Beva e skeud ho tiouaskell !  
Tridal a ran en hoc'h iliz,  
Ha va c'halon a lamm em c'hreiz.
2. Santel, santel, teir gwech santel  
Eo ti ar Roue peurbadel ;  
Santel 'vel ar spern entanet  
A welas gwechall ar profet.
3. Santel evel ar c'hraou dister  
Eo ganet ennañ or Zalver,  
Santel meurbed 'vel ar mene  
Ruziet gand gwad gwir Vab Doue.
4. An iliz eo ti ar pardon,  
Ti ar bedenn, neiz ar galon :  
E-harz Jezuz, tud glaharet,  
Ema ar peoc'h hag ar yehed.
5. M'ho-peus naon ha m'ho-peus sehed,  
Tostait ouz taol ar banked :  
Jezuz amañ d'e vugale,  
A ro bara divin an neñv.

## CANTIQUE DE LA PAROISSE

1. *Qu'il est doux, Dieu Saint,  
De vivre à l'ombre de vos ailes !  
Je tressaille en votre église,  
Et mon cœur tressaille en moi.*
2. *Sainte, sainte, trois fois sainte  
Est la maison du Roi éternel ;  
Sainte comme le buisson ardent  
Que vit autrefois le prophète.*
3. *Sainte comme la pauvre crèche  
Où est né notre Sauveur,  
Très Sainte comme la montagne  
Rougie par le sang du Fils de Dieu.*
4. *L'église est la maison du pardon,  
La maison de la prière, le nid du cœur :  
Aux pieds de Jésus, pour les affligés,  
Se trouvent la paix et la santé.*
5. *Si vous avez faim et si vous avez soif,  
Approchez de la table du banquet :  
Jésus ici à ses enfants,  
Donne le divin Pain du ciel.*